

## Al Laponed, mibien an heol

(Ar pennad-mañ a zo bet troet diwar ur skrid savet gant ul Lapon, ha bet degaset deomp nevezig 'zo. Fiziañs hon eus e vo dedennet hol lennerien gant pezh a lavar diwar-benn e vro, har ar c'hudennoù anezhi.)

E 98 goude H.S. e ra meneg an istorour latin Tasit eus ar « fenni » en e levr « Germania ». Ar ger « fenni » a dalvez kement ha « Laponed » ha « Finlandiz » war un dro met, war a seblant, eus al Laponed eo e oa kaoz gantañ. E 555 e komz ar skrivagner bizantin Prokop eus « fenni skierien » en Enez Thule (Skandinavia). E diwezh ar VIIvet kantved e lavar Paulus Diaconus, e yelont war skioù, e vezont gwisket gant foulinoù renned, ez eus dezho tropelloù renned, hag e vont diwar kig kriz. Buhez kantroerien an Norz-Pellan a zo bet taolennet ivez gant tud evel an Norvejiad Ottar, en amzer Alfred Vras, roue Bro-Saoz, hag an Islandad Torolf Kveldufson, kaset gant roue an Norvej, Harald, da sevel tailhoù diwar al Laponed ha da ober aferioù ganto.

E-doug lodenn diwezhañ ar Grenn-amzer ha dindan ar roue suetat Gustaf I Vasa, kenwerzhourien zo a save tailhoù ivez e-barzh ur c'horn-bro a veze graet « Lappmarker » (Bro al Laponed) dioutañ. Titl Charlez IX, roue ar Sued, a oa : « roue al Laponed ha broioù an Norz ». Roue Danmark e yeas droug ennañ, abalamour ma felle dezhañ ivez bezañ roue al Laponed. War-dro 1674, an drevadennerien gantañ, o tont eus ar Sued hag eus Finland, a stagas da derriñ tachennoù-douar war ribl ar steroù ha tro-dro d'al lennoù. E 1751 e voe treset da vat an harzhoù etre an Norvej hag ar Sued : d'ur stad hepken e paeas al Laponed o zailhoù diwar neuze, e-lec'h d'an div vro evel en araok. 10<sup>vet</sup> paragraf an emglev-se a vez graet « Magna Charta » al Laponed anezhañ. En XIX<sup>vet</sup> kantved e voe resisaet « bevenn gounidigezh » al Laponed, da lavarout eo, an droad evita da besketañ, da chaseal ha da gantreiñ en o frankiz gant o renned a-hed harzhoù an Norvej ha re ar c'hounidigezh.


Orin al Laponed hervez ur vojenn

Ar vojenn « Goulou-Deiz » a gont penaos e teuas hendadoù al Laponed, Aslak ha Berif, eus tu ar Reter asamblez betek ar « Vro Wenn ha Glan dindan Steredenn ar Pol ». E-pad pell amzer o deus bevet ha labourret ha kresket. Da c'houde e tilojas Aslak hag e ouenn betek an aodoù ha du-se eo ec'h en em gavjont gant Suediz, a zeskas anezho da sakreal, da vutuniñ ha da lonkañ. E dal'ch o vistri nevez, e kollas al Laponed o furnez hag o bro.

Barzh broadel al Laponed

Anders Fjellner a voe ganet e 1795 war  
(Da heul p. 9.)

BREIZ — Pajenn 7



Laponia, bro ar renned

(Foto A. Berglund).

## DRE AR VRO


« Keleier Naoned » Ur gelaouenne lieskrivet e brezhoneg, « Keleier Naoned », hec'h anv, a zo deut er-maez nevez zo. « Klask a raio bezañ ur gelaouenn sevenadurel evit brezhonegerien Bro-Naoned hag ul liamm kenetrezo. Spi hon eus e tiwano kelaouennouigoù all e kerioù all e Breizh met mallus e oa ober un dra bennak e kêr vrasañ Breizh... » D'ar re a soñjo « ez eus ervat kalz re a gelaouennoù brezhonek, pep hini o krakveañ en he c'horn gant un dornad lennerien » hag « e vefe gwelloc'h dezho en em strolañ evit embann ur gelaouenn hepken, ur gelaouenn a-zoare », e respont skrivagnerien « Keleier Naoned » : « N'omp ket a ali ganto, tamm ebet. Liesdoare eo ar gevredigezh ha liesdoare eo eta an Emsav... Seul vuhezec'h e vo an Emsav ha seul niverusoc'h ha pinvidikoc'h e vo hor c'helaouennoù brezhonek. » Ouzhpenn keleier e vo kavet war an div niverenn gantañ ur studiaden diwar-benn ar sorserezh en Amerika, un danevell diwar bluenn Goulven Morvan, « Kolibri », ar pennad diwar-benn Kêr an Naoned, hag... ur vandenn dreset.

Chañs vat d'ar gelaouennig nevez !  
Merour « Keleier Naoned » : Jakez Derouet, 9, avenue de Tolède, 44100 Nantes  
Koumanant-bloaz : 10 lur (skoazell : 20 lur) — 10 niverenn ar bloaz.

Klevet er radio Christian Bonnet e

« Radioscopie » : « ar gudenn n'eo ket gouzout hag en eo ret kelenn ar brezhoneg : kelennet e vez. » Na fur ha frealzus o seurt komzoù ! Perak ne vez ket kelennet ar saozneg, an alamaneg (pe ar galleg) e-giz ma vez kelennet ar brezhoneg : etre un eur ha div eur, pe goude c'hwec'h eur, d'ar merc'her pe d'ar sardon, gant kelennerien a vefe difennet outo en em varrekaat war ar yezh (stajoù, diplomoù, h.a.), un danvez dister er vachelouriezh ? Desket hon eus ivez e oa disheñvel Breizh diouzh « rannvroioù all Bro-C'hall » : an tiez, an arreburi, ar maezioù. Ma... Tud zo ne garont nemet korfoù ar plac'hed ha ne daolont ket pled ouzh o eneoù...

Bro-C'hall, bro Descartes Sanguinetti e 1974 : « (an « otonomisted ») : tud warlerc'hiet, kilstourmerien a glask lakaat petra da adveañ ? Mamm-broioù n'eus ket bet anezho biskoazh pe vamm-broioù a zo marv. » Sanguinetti e 1969 : « Hep kreizennadur ne vefe ket a Vro-C'hall. Bez e c'hellfer kaout un Alamagn, un Itali, abalamour ma'z eus ur sevenadur alaman, ur sevenadur italiat. E Bro-C'hall avat ez eus meur a sevenadur. Ha kement-man n'eo ket aet da get, e c'hellit kredin ur c'hannad eus Toulouse. » Na buan e tremen an traou ! E korf 5 vloaz eo aet da get holl sevenadurioù ar Frans...



Puñsù petrol e Rusia war-dro 1900

## AN EOUL MAEN

*Piv en deus dizoloet an eoul-maen ?*

Hervez, e vefe un Amerikan, Edwin Laurentine Drake, lezañvet ar « C'hornal », ganet e 1818 ha marvet e 1880 en defe kavet an eoul-maen. Koulskoude en deus an eoul-maen un orin kalz kosoc'h evit-se. Dont a ra ar ger eus ur ger latin : petra oleum a dalvez eoul-maen.

En henistor ha dreist-holl hini ar Fenisianed ha Babiloniz, e kaver ar ger-se meneget alies. An implij a oa disheñvel-tre avat : servijout a rae da galafeltrin ar bigi, da virout ar c'horfou-balzamet, pe c'hoazh da startaat ar savadurioù.

Edwin Drake an hini eo en deus kenderc'het an hini kentañ an eoul-maen d'ar 27 a viz Eost 1859 e Titusville e Pennsylvania. Tennañ e veze 30 hektolitr bemdez eus ar puñs. Derou ur redadeg war-du an aour du e oa. Toulloù a voe kleuzet amañ hag ahont gant avanturerien, mal dezho tennañ o finvidigezh eus ar gavadenn-se.

Edwin Drake a oe ar c'hentañ souezhet gant ar barrad-se. Evitañ ne oa ket eoul-maen a glaske, met un dourenn a c'helle hervez an Indianed hiraat ar vuhez ; awalc'h a oa evitañ korvoñ (1) e buñs. Reou all avat a labouras muioc'h ; en o zouez ur paotr a 23 vloaz : John Rockefeller a grogas e 1862 da sevel un impalaeriezh diazezet war an danvez burzhudus-se.

*Penaos e kaver ar gwazennoù eoul-maen ?*

E penn kentañ ne oa ardivink ebet, evel just ; klasket e veze e lec'hioù ma veze gwelet poullou eoul war an douar ; hogen bremañ, e studier al lec'h en doare skiantel araok kleuzañ da welout hag e talvez ar boan ar puñs da vezañ korvoet. A-wechoù e vezer touellet ; krediñ a reer e vo pinvidik n'eus nebeut-tre a eoul-maen ennañ.

*Kenderc'had an eoul-maen bep bloaz dre ar bed*

BREIZ — Pajenn 8

## DIWAR-BENN AL LAPONED

— 35 000 Lapon a zo e Skandinavia : 20 000 en Norvej, 10 000 e Bro-Sued, 3 000 e Finland, hag ouzhpenn 2 000 e ledenez Kola (Unvaniez Soviedel).

— Emañ sevenadur ha doareoù-bevan al Laponed en arvar da vont da get, e Bro-Sued dreist-holl, abalamour da binvidigezhioù an douar (mengleuzioù Ki-

E 1900 e kenderc'hed 21 million tonenn ; e 1960 1 miliard ; e 1970 2 vi-liard.

Araok ar brezel bed kentañ e talvez ar gremm (2) roet gant an eoul-maen nebeutoc'h eget ar 5 % eus ar gremm implijet dre ar bed ; e 1970 e talvez evit ouzhpenn 70 %. Kement-se diwar goust ar glaou.

*Peseurt broioù a genderc'h ar muiañ ?*

E penn kentañ e teu ar Stadoù-Unanet : tost da 40 % eus kenderc'had ar bed. Mont a ra koulskoude war zigreskiñ. War lerc'h ar Stadoù-Unanet e teu Bro-Rusia : 15 %. Er mare-mañ, broioù ar Reter tostañ a zo deut da vezañ pourvezourien pouezus evit ar broioù all : Bro-Irak, Iran, Siri, Arabia Seoudit a genderc'h bremañ muioc'h eget ar Stadoù-Unanet.

*Pegement e koust al litrad eoul-maen kruz ?*

Diaes eo lavarout en un doare resis. Kemmet en deus kalz abaoe deroù an enkadenn. wardro 11ct gal e vez paeet al litrad eoul-maen o tont eus ar puñs. Ar genwerzhourien a gemer wardra 30ct gall. Ar peurrest a zo da vezañ rannet etre ar c'hompagnonezhioù hag ar stad.

Awalc'h a eoul-maen a zo betek ar bloavezh 2000. Ret e vo neuze implijout ur gremm all : ar gremm dec'hanel (3), pe hini an heol. Taolioù arnod a zo bet graet dija. Bez e c'hellod ivez implijout danvezioù all evel ar « methanol », pe an « alkoll ethilique ». Ret e vo avat kemañ ar c'hefluskerien ; ha keroc'h c'hoazh e vo eget an eoul-maen.

(1) korvoñ : tennañ gounid ; (2) gremm : energie ; (3) gremm dec'hanel : energie atomique.

*Notenn.* — Degas a reomp soñj d'hol lennerien hon eus embannet ur pennad (gant ur gartenn) diwar-benn enkadenn ar petrol (« Dindan 30 bloaz e yelimp war varc'h... »), war « Dihun » miz Mezheven... 1971. An dro-se hon doa lañs war an darvoudoù...

runa, da skouer), ha d'an douristelezh.

— Emeur o klask unvanij al laponeg : n'eo nemet un nebeut bloavezhioù ez eo bet lakaet ar yezh dre skrid, ha div rannyezh a zo (tost-tre an eil ouzh eben). Tuet e vefe an dud hiziv da ziazezañ ar yezh skrivet war rannyezhou an Norz (dre ma'z eo niverusoc'h al Laponeg eno), met re ar Su o defe c'hoant e vefe dalc'het kont eus o rannyezh.

## AN ISLANDIZ HAG AR MOR

A-viskoazh eo bet staget istor Bro-Island ouzh ar mor. Daoust dezhi bezañ lec'hiet etre ar 60vet hag ar 70vet keplenn norzh n'eo ket ur vro eus ar re yenañ dre m'emañ etre levezon froudoù tomm ar Gulf Stream ha froudoù yen ar Reter.

A-hed ar c'hantvedoù he deus anavezet enkadennoù a bep seurt : an hinad o vont war yenañ, ar c'henwerzh war vor o kouezhañ pe gemeret gant estrenion, ar pesketaerezh distabil, ar pesked o tec'hout a-wechoù pell diouzh an aodoù, nebeut a dra da ezporzhiañ. Daoust d'an diaesterioù-se ez eo Bro-Island ur vroad pinvidik en 20vet kantved. E deroù 1973, 77 hag a oa marilhet, peza rae dre holj 63.633 tonenn ; bigi a bep seurt : bigi treizhidi, bigi dezougen, madoù pe eoul-maen, bigi diwall al lec'hioù pesketa, bigi saveteñ. Ar bigi-se, nemet ar bigi eoul-maen a zo etre daouarn tud ar vro.

Pouezus-tre eo ar pesketaerezh e Bro-Island. E 1965 ez eus bet pesketaet 1.199.100 tonenn besked : moru, harinked, dreist-holl met ivez givri sabl, chevred, tenegenned. Abaoe ar XIV vet hantved ez ezporh Bro-Island pesked dise-c'het, hag ivez eoul pesked, ha pesked salj Abaoe 1910 ez int krog da ezporzhiañ pesked skornet. E 1950 e veze skornet 20 % eus an ezporzhiadurioù, e 1972 : 70 %.

N'he deus ket Bro-Island pinvidigezhioù naturel : n'he deus ket koad, hag e c'hondan a zo paour. Ret eo dezhi enporzhiañ hec'h ijinerezh penn da benn hag ivez kalz eus ar boued bevezet er vro. Koulskoude ez eo ur vro a ra berzh : a drugarezh d'ar pesketaerezh, he deus tizhet ar c'henderc'had broadel a 2480 dollar evit pep annezad etre 1966 ha 1970.

An holj a oar pegen arvarus eo pesketa er mor tro-dro da Vro-Island. En abeg da se ne implij Islandiz nemet bigi sur ha fardet mat. Komprenet o deus an talvoudegezh en deus ar mor evito. Abaoe 1930, e reont studiadennoù reoliek war ar pesketaerezh. Studiet o deus ster ar froudoù, buhez ar morlizadur (plankton), doare-bevan ar pesked. Nevez zo o deus kroget da studiañ ar saotradur, hag an efedoù war loened ar mor. Kemer a reont perzh en enklaskoù etrevroadel, dre o skoazell hag o skiant prenet. A-benn difenn pesked en aodoù, diskaret muioc'h mui gant pesketourien estren, a zastum forzh petra o deus renket kemer un disentez e 1972 : astenn betek 50 miles bevenn ar pesket aotreet. Seurt disentez n'he deus ket plijet d'ar holj ; trubuilhoù ha krozoù o deus bet gant broioù all

(Diwar Courrier de l'UNESCO).

## AR BREZHONEG ER GER

Disul 27 a viz Genver, e Menez Kamm, ez eus bet savet ur gevredigezh evit ar re a ra gant ar brezhoneg en o zi.

An anv dibabet a zo « ar brezhoneg er gêr ». Ar brezhoneg a zo ar yezh nemeti implijet er gevredigezh.

N'eo stag ar strollad ouzh tu politikel ebet na relijiel (1) ebet.

Evit bezañ ezel eus « Ar brezhoneg er gêr », ha degemer ingal kelc'hizheroù, folennoù an enklaskoù hag all, ez eus ur skodenn (20 lur) da gas d'an teñzorier :

Gurvan GUELLEG, 1, straed Fonck, Brest, CCP Rennes 2740-56 - Gurvan GUELLEC.

En em vodañ a ray ar strollad war-d-o bep daou viz. Dibennou-sizhun a vo graet ur wech an amzer ha marteze ur c'hamp e deroù gwengolo.

(1) An devezhioù-emvod dibabet n'int ket memes re ha re ar strollad katolik « Emglev an Tiegezhioù » evit ma c'hellfe ar re o defe c'hoant, kemer perzh en daou strollad.

# Al Laponed mibien an heol

(Kendalc'h)

Ur menez uhel ha moal, ha kerkent e voe gwalc'het ar bugelig e-barzh ur vammenn. Mont a reas da Upsala da bleustrin war an deologiezh hag e 1841 e voe anvet da bastar e parrez Sorsele (Laponia ar C'hreisteiz) : eno e varvas e 1876. Hervez ar c'helenner Ernst Manker, ez eo e varzhonég bras, « Peiven Parnen » (Mibien an Heol) un danevell brav-meurbet, a ziskouez e ouie A. Fjellener diouzh istor, mojennoù, ha yezh al Laponed, evitañ da grediñ e oañt an dud kentañ deñt da chom e Skandinavia.

Al Laponed hag ar Gristenelez

Prezeget e voe an Aviel da dud an Norz gant Stenfi war-dro 1050. E 1350, ar c'heskab Upsala a yaes betek Tornio (Finland) hag eno e voe badeziet un nebeut Laponed gantañ. E dibenn an hevelep kantved, ul Laponex, Margareta hec'h anv, anezhi ur gristenez, a yeas eus Bro al Laponed etrezek Lund (Sued-ar-C'hreisteiz) da c'houlenn digant rouanez ar Sued kas misionerien d'al Laponed. Ar rouanez a asantas, Goude ar Reforme e reas Illiz Bro-Sued wardro al Laponed : e Ker-Lycksele e voe savet ur skol evit reiñ un deskadurezh gristen d'al Laponed yaouank.

Buhez an amzer-gwechall

Anavezout a ran un den kozh, Anders Larsson, a zo o chom tost da lenn Juktan, nepell d'ouzh va c'hêr c'hinidik, Anmar-näs : Larsson a zo ul Lapon penn-kil-hatroad. 88 bloaz en deus, hogen yac'h-pesk eo c'hoazh, daoust dezhañ da vezañ berrwel un tammig. N'eo ket bet ur magerrenned evel ar pep brasañ eus e genvroiz : labourer-douar eo bet er « c'horn-bro gouez ». Eman e atant o kouezhañ en e boull, hag e vibien n'o deus ket c'hoant da zerc'hel anezhañ ken. Ur marvailher dispar eo, hag e envorennoù a ziskouez splann pegen kalet e oa buhez al Laponed en amzer-gwechall. Setu un s'tor en deus kon-tet din.

Tad-kozh Anders a gouezhas klañv-fall pa oa Anders hag e vreur o vont gant o zropell war-du ar menezioù. An tad-kozh klañv, e wreg hag e vab-bihan Lars Enar a chomas en ur « c'h-kata » (ul lochenn c'holoet a daouarc'h hag a vein plat), e keit m'edo eontr Lars Enar gant ar renned. Pa zistroas d'al lochenn e kavas ar mab-bihan o kousket war ur c'hroc'henn-renn e-kichen korv marv e dad. Neuze e lavaras Lars Enar : « Emañ Tad o kousket ha netra ken. N'am eus ket c'hoant da zihuniñ anezhan. Ken yen eo, ker yen eo. » War a seblante e oa marv an tad-kozh abaoe un nebeut deizioù, hag ar bugelig en doa klasket dihuniñ anezhañ en aner. Ha pelec'h e oa ar vamm ? Pa varvas he fried ec'h aozas boued d'ar paotr bihan ha hi kuit da glask sikour. Ne zistroas ket avat. Beuzet e voe e-barzh ur waz he doa klasket treuziñ. He fennmarv a voe kavet bloavezhioù goude. An eontr a interes e vreur en un enezennig anvet « Japmek-suolo » (enezennig an anaon).

Alfred BERGLUND.

(da genderc'hel).

BREIZ — Pajenn 9



E Laponia : Alfred Berglund

## Gwechall du-man ar c'hoari horell

Ur bellenn goad eo un horell, a vent ur meilh-dorn. Ar c'hoarierien o deus pep a vazh-dotu. Setu amañ un dachenn c'hoari evit pemp a dud. Ment resis ebet n'he deus. Lakaomp seizh metrad etre pep toull. Keit all etre an « 3 » hag an aroudenn. Ar c'hoarilec'h a c'hall bezan un dirienenn pe ul leurenn noaz. An toulloù a vo bras awalc'h da lakaat teir horell a-gevret. D'aozñ an dro-c'hoari en em lakaio ar pemp kenstriver war an aroudenn. Ac'hano e vannit o bizhier davet an toull 3. Perc'henn ar vazh an tostañ he fenn dotu d'an toull a anvimp 1. An hini pellan a vo 5, anvet eo an horeller pe ar mevel.

Pa zeraou an abadenn emañ an horeller gant an horell war an aroudenn. Ar pevar c'hoarier all a zo pep hini e-kichen e doull ; perc'henned int dezhañ, penn an dotu e-barzh, rak un toull goull n'eo da zen, perc'hennet e c'hall bezañ gant an hini a lakaio penn e zotu ennañ.

Setu krog ar c'hoari. An horeller a ra gwellañ ma c'hall da gas an horell — a-ruilh, pe a-daolioù — d'an toull kreiz, gant e zotu. Ar pevar all a enebo outañ da dizout e bal ; dre vou-tañ, chachañ, pe skeiñ war an horell d'he fellaat, gant o bizhier.

Lakaomp eo aet an horell en toull kreiz. Echu eo ar c'hrogad. Ar 4 eo a rank mont da vevel. En taol all da c'houde e vo 3 an horeller. Nemet ar mevel a c'hall e pep koulz perc'hennañ un toull goull, evel ne vern piv.

E-lec'h kas an horell d'an toull kreiz en deus ar mevel ar gwir d'he c'has zoken, en un toull perc'hennet.

En daou zegouez-mañ an hini a goll e dra eo a ya da vevel. Rak-se 'ta brasañ preder ar perc'hennet eo di-wall o zoull ha pellaat an horell dioutañ ha diouzh an toull kreiz.

Skuizus eo kefridi ar mevel pe horeller, o vont dibaouez da gerc'hat ha da gas an horell. Pa ne teu ket a-benn d'en em dennañ kuit, an 1 a c'hall

ober vat dezhañ. Pa'z eo gwall luziet ar stourm, pe ma'z eo re zivarrek an horeller, an 1, a greiz holl a hopo : « Rank pe rank, cheñch toull a vank. »

Kerkent perc'henned an toulloù a rank cheñch hini ; un digarezh vat d'an horeller mont en unan, ma'z eo dilu.

Lod a lavar eo ar c'hoari horell kar d'an « hurling » diduamant muiañ karet an Iwerzhoniz. Neuze e c'haller lavarout eo aet an hurling war wella-l a-hed ar c'hantvedoù, tra ma tislebere an horelladeg. Pe marteze eo gwelloc'h aozet e reolennoù e lec'hioù all a Vreizh ?

Hor c'hoari-ni a oa yud awalc'h. Ma veze gwarezet hon treid gant hor boteier koad, hon devesker hag hon daouarn o doa da c'houzañv taolioù kalet a-wechoù. Emichañs eo abalamour ne zoujemp ket a-walc'h d'ar reolennoù kozh, marteze dianav dimp.

Gant ar rummadoù paotred yaou-ankoc'h eget hon hini eo bet dilezet ar c'hoari horell en Hanveg.

D'am meno e vefe mat adreizañ hon horelladeg. Pe marteze deskiñ an hurling d'hor yaouankizoù. Skolidi ha skoliadezed Pariz a welan o c'hoari hurling.

Herve ar Menn.

(1) Da zeraou pep krogad hepken e loc'h an horeller diwar an aroudenn gant an horell. En degouezioù all, daoust ma vefe kaset an horell 40 a vetradoù ouzh an toulloù, eo d'an horeller he zostaat gant e zotu.

## HOL LENNERIEN A SKRIV

D'am soñj ez eo « Breiz » gwelloc'h-gwellañ. Mat eo din lenn « Dihun » ha pennadoù skrivet e galleg diwar-benn kudennoù a-bouez. Degemerit va gourc'hemmennoù evit pep tra.

L. Menex (Sant-Brieg)

# soniou ha gwerziou : « dastumomp ar bruzun »

Pep hini ac'hanomp a oar kalz pe nebeut a ganaouennoù pe, da vithañ tammou kanaouennoù. Kalz diouto n'int ket bet mouret, ul lodenn vat eus hor lennegezh komzet ez int. Talvoudus int nag hon dlead eo o dastum. Ha ma vez kalz pennaouerien e vo gallet kloakaat darn eus ar sonioù-se, tonket da vont da get a hend-all.

Setu aman darn eus ar sonioù pe gwerzioù am eus bet klevet gant kanerien da goroll, peurliesañ.

Gwask warnei (1) ta, kamalad, gwask warnei ar bloaz-mañ, Marteze ar bloaz a zeu, ne vimp ket dre aman. Marteze e vimp marv, pe e vezimp kaset, En tu all d'ar mor don, 'mesk ar vorianed.

Ni zo daou baotr kozh hon daou, a zo berr hon halen (2) Pa ne c'hellimp ket mont ken, ni raiñ dre an daou benn.

Ma vez gleb'et an deotenn ar vombard a sono, Gant jistr mat d'hor c'hourlañchenn, ivez ni a gano.

Ma muzelloù zo faoutet, va ginou gerzh a-dreuz, Non ket gouest da ganañ ken, gant ar sec'hed am eus.

Awalc'h hon eus kanet, evit ar pezh hon do Rak ar merc'hed zo amañ eo toull o godello.

Marijanig zo kollet he mouchouer ganti, Ya o tefot kaout arc'hant 'deus bet morse hini. Jobig gant un hanter tok eo e c'holo e benn, Da lakaat en dro d'e c'houg 'n eus ket ur gravatenn.

N'hoc'h eus ket gwelet Stefan, o vont da foad Lezneven Digant peder dousenn viou ha teier buoc'henn.

Ho n'eo ket me Bolomig, an hini a ra loaioù, Loaioù houarn, loaioù koad, ha loaioù Louargad (3).

- (1) Warnei evit warnezi.
- (2) Halen e lec'h halan da glotañ gant penn.
- (3) Louargad a oa brudet gwechall war ar c'hilvizerezh.

(Da heuilhañ.)

Herve ar Menn.

BREIZ — Pajenn 10

